

## IV

Tr men 'hra é zehuehen  
E lonkein én tavarnieu  
Hag a p' arriüa ér gér  
E hra döpen goalanzer :  
É vugalé hag é voez  
E gouska lies er mez.

## V

Dont 'hra de vout digalon  
Ha rustoh aveit ur lon ;  
Pe vé karget a évaj  
Nezen e ia én araj :  
Ne sel mui get Петра skoëin,  
Ne sél mui aveit lahein.

## VI

Ne gleuér ar er mézeu  
Meit konzal a hoaleurieu :  
A dan hag a lahereh  
Ha dalhmat a grougereh,  
Ha pep goa'eur vé labour,  
Kasi perpet, un évour.

## VII

Bugalé er vèuerion  
E vé goan ha digalon ;  
Ou goèd e vé pusuniet  
Erauk memb ma dant ér bed ;  
Iouankik flam e varüant,  
Lahet dré er guin-ardant

## VIII

Mar faut d'oh, èl gueharal,  
Chomel tud kriü ha léal,  
Goarn er peah en eurusted,  
Hou inour hag hou iched,  
N'évet ket hed hou puhé  
Ag er guin-ardant lous sé

## IX

Eit kenderhel, Bretoned.  
Brud mat Breih-Izel karet ;  
Eit ma vou hou pugalé  
Tud nerhus èl oh eüé,  
Harzet pèl ag hou keneu,  
Guin-ardant hag évajeu.

EIL DISKAN

## VI

Ha pe za d'ein gout hé guélein,  
Me doui penaus hum zizolein.

## VII

Mes, allas ! p'hé guélan tostet,  
Me bleg me fen ha me huannad !...

## VIII

Troieu kuh héol, e ha bandé  
G' hé seud de fetan Guirioné.

## IX

En dé aral me lak em s'pred  
Monet d'inou eit hé guelet.

## X

M' azi ar vordig ér fetan,  
Get ur boen vras em heh inéan.

## XI

En dé sen 'oen chonjet erhat  
Dizol dehi me halonad !

## XII

Mes a p' hé spian é tonet  
Forh fonnus e han de guhet !

## XIII

De guhet e han forh fonnus,  
Haval dch ur had eucenus!

## XIV

Ha touchant, skanüik hé guélan  
E évet deur ag er fetan.

## XV

Hag hé lonned p'hi des deureit  
Ar hé goar d'er ger e ma oëit ;

## XVI

Nezé, èl ur heh eulanig,  
Me hra en dro d'er fetanig,

## XVII

Aveit ansé en hé guélet  
Ahoel eskéd men Dous karet ..

## V

Ha bremen, Bretoned nerhus  
Sterdet ar hou preseu ;  
Er chistr e vér é frond padus  
E garg ol hou krancheu

## VI

Petra e dal laret hui d'ein,  
Ur banig chistr stanket  
A pe vé en dén é tèbrein  
Eit forein er séhed ?

## VII

Ha pe vér ér parkeu frankus  
E labourat en doar,  
Eit lakat er galon nerhus  
Er chistr e zou hemb par.

## VIII

Ean zou évaj er goaleurus  
El hani er pinüek ;  
Nen des évaj ken ahehus,  
Nen des évaj ken huek :

## IX

Ean zou goèd er guir Vretoned,  
Hemb zou n' hellant biéin.  
Chomamb fidél d'hun Chistr, pautred,  
Mes goutiamb en évein !...

## Pardon Keleüen

Ar un ton hanaüet

## I

A pe oen mein dénig iouank, seitek pé trihuch vlé,  
A pe huélen mein me mestrez me halon e hré joé

## II

A pe ganné ur huerzennig petremant ur poz kan,  
Saillein e hré me halonig èl mamen ur fetan.

## III

Hé deulagad glas en hé fen e zou ken lugernus !...  
En dén iouank hel ou sellet haneh e zou eurus.

## IV,

Er hetan gueh 'm boé hi guélet, oé é pardon Keleüen  
Gronet a vrageriseu zei ar hé goug ur hoalen

## V

VIII

Mar faut d'oh, èl gueharal,  
Chomel tud kriù ha léal,  
Goarn er peah en eurusted,  
Hou inour hag hou iehed,  
N'évet ket hed hou puhé  
Ag er guin-ardant lous sé

IX

Eit kenderhel, Bretoned.  
Brud mat Breih-Izel karet ;  
Eit ma vou hou pugalé  
Tud nerhus èl oh eüé,  
Harzet pèl ag hou keneu,  
Guin-ardant hag évajeu.

EIL DISKAN

Ia !

Get er chistr toramb hun hoant  
Ha malloh ! d'er guin-ardant !...

**MEN DOUS**

Ar ur ton hanaùet

I

Neket 'n hou ti, tavarnourez (diù bueh) } diù bueh  
Em es me choéjet me mestrez

II

M'em es hi choéjet tostoh d'ein :  
Ur plah koant é plijout 'hra d'ein

III

M' hé har, ha hi ne houia ket :  
Chetu er peh 'hra poén d'em s'pred

IV

Mechal penaus 'vehè d'ein mé  
Dizol dehi me haranté ?

V

M' hé guèl erhoalh ér pardonieu,  
Ha d'en noz barh er filajeu ;

Ha touchant, skanùik hé guélan  
E évet deur ag er fetañ.

XV

Hag hé lonned p'hi des deureit  
Ar hé goar d'er ger e ma oeit ;

XVI

Nezé, èl ur heh eulanig,  
Me hra en dro d'er fetanig,

XVII

Aveit ansé en hé guélet  
Ahoel esked men Dous karet ..

**Er Chistr Neùé**

AR DON : *Margariùik*

I

Peizanted, er gué zou karget  
Ag avaleu milen (diù bueh)  
Golhet hou fustigeu, pautred, } diù bueh  
Er bléad er goulén

II

Lakeit hou fusteu, hou toneu  
De dranpein barh en deur  
Ha paket hou pern avaleu  
Er hornig ag hou lér

III

A pe zei er gouian kalet,  
Karget hou melinieu  
Ha troeit get plijadur, pautred,  
Malet hou avaleu.

IV

Ha barh er preseu stoubet mat  
Paket hou markajen,  
Lakeit plouz kerh ar bep trohad :  
Hou chistr e vou milen.

Ar un ton hanaùet

I

A pe oen mein dénig iouank, seitek pé trihueh vlé,  
A pe huélen mein me mestrez me halon e hré joé

II

A pe ganné ur huerzennig petremant ur poz kan,  
Saillein e hré me halonig èl mamen ur fetan.

III

Hé deulagad glas en hé fen e zou ken lugernus !...  
En dén iouank hel ou sellet haneh e zou eurus.

IV,

Er hetan guéh 'm boé hi guélet, oé é pardon Kélien  
Gronet a vrageriseu zei ar hé goé ur hoalen

V

Hé hoéfig dantel ar hé fen, doh un in oé haval,  
Haval doh un estig bihan ar ur boud e kannal.

VI

Pe oé achiù er gopéreu ha groeit er hetan bal,  
Me zihuskas me zok em dorn hi goulén de zansal ?

VII

— Oh ! gieu, oh ! gieu, dénig iouank, get kalz a blijadur  
Rahuiz un dén ken karadek n'hellan ket a dra sur.

VIII

Me grog enta en hé dorn guen, d'er horol hi hondu :  
Ol deulegad en dud iouank goeh ar nomb a bep tu !

IX

Men dous gorollas ken skanùik ha hi e hounidas,  
Un tanterig sei du moaret hag ur rubannen glás

X

Chetu tremenet en anderù hag achiù er horol  
Dam ni. hundeu d'er ger, men dous, rauk ma kuhei en.  
[héol...]

XI

Na pegement a blijadur en dé sé m'em es bet.  
E tremen dré henteu Kélien get men dousig karet

XII

Er raned glazik ér lenneu sonnè ur mélodi,  
Ur mélodi ken kaer, men dous, èl ne gavér hanni.

XIII

Hag en aùel barh ér gué derù e ganné ken bourus ..  
Biskoah ! Biskoah ! men dousig koant 'n dont ket  
[bet ken eurus...]

**Peizanted, mem breder,**

*Aveit ob em es groeit er sonnennu men ; groeit un digemèr mad anebè ba kannel hé, get kalon, ér festeu, ér pardonieu, ér filajeu, ér lericu nehé...*

*El en amzer gueharal, Bretoned, kannet dalbmat ; er sonnennu e lak en dén joeius hag e ra muiob a galon debou de labourat. Mes kannet perbet é brehonek. Ne gousiet ket biskoah bou pégu ge*

II  
M'em es hi choéjet tostoh d'ein :  
Ur plah koant é plijout 'hra d'ein

III  
M' hé har, ha hi ne houia ket :  
Chetu er peh 'hra poén d'em s'pred

IV  
Mechal penaus 'vehè d'ein mé  
Dizol dehi me haranté ?

V  
M' hé guél erhoalh ér pardonieu,  
Ha d'en noz barh ér filajeu ;

De dranpein barh en deur  
Ha paket hou pern avaleu  
Er hornig ag hou lér

III  
A pe zeï er gouïan kalet,  
Karget hou melinieu  
Ha troeit get plijadur, pautred,  
Malet hou avaleu.

IV  
Ha barh er preseu stoubet mat  
Paket hou markajen,  
Lakeit plouz kerh ar bep trohad :  
Hou chistr e vou milen.

Un tantig set ou moaret hag ur rubannen gias

X  
Chetu tremenet en anderù hag achiù er horol  
Dam ni. hun deu d'er ger, men dous, rauk ma kuhei en.  
[héol...]

XI  
Na pegement a blijadur en dé sé m'em es bet.  
E tremen dré henteu Kelüen get men dousig karet

XII  
Er raned glazik ér lenneu sonnè ur mélodi,  
Ur mélodi ken kaer, men dous, èl ne gavér hanni.

XIII  
Hag en aùel barh ér gué derù e ganné ken bourus ..  
Biskoah ! Biskoah ! men dousig koant 'n dont ket  
[bet ken eurus...]

### Peizanted, mem breder,

*Aveit oh em es groeit er sonnennu men ; groeit un digemèr mad anebè ha kannet bé, get kalon, ér festeu, ér pardonieu, ér filajeu, ér lericu neüè...  
Èl en amzer guebaral, Bretoned, kannet dalhmat ; er sonnennu e lak en dén joeius hag e ra muiob a galon debou de labourat. Mes kannet perpet è brehonek. Ne gousiet ket biskoah hou pégeu ge.  
er sonnennu gallek dijauj ba lous e za d'oh ag er bérieu ha ne gomprennet ket en hanter anebè. Hou sonnennu brehonek e zou kant kueh braüoh eit er pozeu dibaill sé. Kannet bé enta ha ne gannet nameit hé*

#### Bretoned, konzet brehonek :

Er lavar brehonek e zou unan ag er lavarieu kohan ha kaeran e zou ar zoar er bed men ; hileih ag er girieu e gonzamb hoah hiriù en dé e zou ken koh èl er bed.  
Tud disket bras é studia dalhmat er brehonek ha bout e zou bremen meur a skol émen e tisker er brehonek. Chomamb enta staget doh ur lavar ken prizet ha konzamb ean perpet étre zomb. Miramb éan fur perpet ; dihoalamb de geijein en é vesk er honzeu gallek diben e gleuamb get er ré ne houï ket mat er brehonek, hag eit kement sé diskamb len ha skriu hun lavar  
Disket eüé er brehonek d'hou pugalé, Bretoned. Kours erhoalh e vint de ziskein gallek a pe iint d'er skol, hag ind en diskou guelloh hag ésoh inou cit ér ger. Elsè hou pugalé e chomou èl oh Bretoned kalonek, fier ag ou hanù a vreton ha fier eüé ag ou lavar ; rak en hani e houï ur lavar ken kaer èl er brehonek e hella bout fier anchou.

#### Peizanted, chomet guir Vretoned...

Guir Vretoned perpet hag é pep leh ; Bretoned a lavar hag a zillad.  
Hui pautred, goarnet hou kramailonnu belouzenet ha hou laka ken braü, ha ne husket ket biskoah er paltoieu dihaill e huéler bremen get en dud iouank tro ha tro d'er hérieu.  
Hui merhed, goarnet eüé hou korveu-broh belouzenet ha hou laka ken koant, ha sklapet pel a zoh oh er harakoieu brikemardet e huéler en amzer men ken stank get er merhed iouank  
Nen des nitra dihaillou na disprizusoh eit er paltoieu hag er harakoieu sé : dizinourein e hrant hun guskemanteu ken kaer.  
Ia, chomet guir Vretoned. Miret hou akustumansu koh ha kerhet atau ha muiob mui de bardonieu er Sent ag hun Bro;er Sent sé hag en des saüet Breih ken ihuél. Reit ou hanüeu d'hou pugalé e leh mont de glah dehé hanüeu gallek ha n'hellet ket memb distill en hantér ag en amzer.

#### Bretoned,

Beet fier bout Bretoned : nen des ar en doar pobl erbet ken kalonek èl pobl er Vretoned. Ne hues chet de gaout meh dirak dén erbet ag hou lavar hemb par, ag hou kuskemantèr kaer nag ag hou akustumansu bourus ; kredet mé, hui dala hileih guél eit er ré e hra goèb a hanoh.

#### Peizanted,

*Karet Breih, hun Broig keb. Karet eüé er mézeu ha chomet de labourat hou parkeu : nen des michèr erbet ar en doar ken inourapl èl hun hani.  
Saüamb enta ibuel hun penneu, Breibis, ba sel gueb ma kleuemb un andel benak e konzal fal ag hun Bro pé ag er Vretoned, lakamb ean de daüein en ur huchal a boez hun pen hag a zan hun halou*

#### Er Vretoned er guellan !

#### Biüet Breih de virüikin !

(Er sonnennu men e zou d'en hani en des hé groeit)

**LOEIZ HERRIEU,**  
**Barh ha Labourér-Doar.**

Kavein e hrér er sonnennu men e ti en Etru Bayon, livrou, 69 ru er Morbihan, én Orient. Deu vlank e gousa peb unan anebè ; mes bout e zou prizeu izelloh eit er ré gemer hileih ar en dro, eit strèu ar er mézeu.